

228

Dans-tro,

(292, suite)

Var an ton gallec.

An deiz-all, pa voan o pourmen
 Pen-da-benn Pradic ar Fo,
 E rancontris eur berjeren
 Hag a voa cousget-maro.
 Ha me gemeret soudan,
 He, he, he, he, he, he, he;
 Ha me gemeret soudan
 He baneric ozil quenn.

Hag ar berjeren, dre valeur, (293)
 A zifun var g'ementse;
 Hag hi crial: perac teuleur
 Ho taouarn var an dra-ze?
 N'o po get, a dra certen,
 Va, va, va, va, va, va, va;
 N'o po get, a dra certen,
 Va baneric ozil quenn.

Bez tranquil, va mignonezic,
 Me zo mat eur marc'hadour;
 Mar gemerân da baneric
 E po digeneme aour;

Me baeo, a dra certen,
 Da, da, da, da, da, da, da;
 Me baeo, a dra certen,
 Da baneric ozil quenn.

Va baner ne verzo prenet
 Na dre aour na dre arc'hant;
 Gant va Mam pa voe d'in roet,
 E lavarais en instant: (294)
 Ne ro james da quisten
 Da, da, da, da, da, da, da;
 Ne ro james da quisten
 Da baneric ozil quenn.

Qea!.... da vam a zo ur folles,
 Eus an amzer tremenet;
 Pa voa yaouanañ ne deus james
 Bet an dra-ze refuset,
 Ha ne viras get certen
 He, he, he, he, he, he, he;
 Ha ne viras get certen
 E c'hoz baner ozil quenn.

(Vol. II, p. 292-294).
 5 str. numérotées.